

YF_0111_Kimiadou ar gard mobil

war don: ar seiz skiant naturel

Ni a lavar kenavo en ur guitaad on bro
Tostait oll tud yaouank, ha tadou ha mammou
Tostait merc'hed yaouank da gleved on c'himiad
Klevit paotred ar Guinkis, deuz parrez ar Houarc'had

Ni paotred ar gard mobil hal larda hon botou
Da c'hortoz ma vo red deom stardan on c'horioù
Da bartian ivez war-lerc'h ar gouskrivet
Rag ar brezel a vo stard, hervez am-eus klevet

Ni a lavar kenavo da gentan da Guinkis
Rag en on bugaleaj, a-hed on yaouankiz
Enni om bet savet ha maget dizoursi
Ha pa vim e-barz ar boan, sur a zonjfem enni

Kenavo a lavarom ivez d'an oll jeuiou
A c'hoariemp ni gwechall gant on c'hamaradou
Kartou, boulou ha killou, oll ez int a-gostez
Kenavo d'an oll jeuiou a oa en hor c'hontre

A pebez kalonad evit ur paotr ugent vloaz
Tremen hep gounid netra en e amzer wellan
Kuitaad ar pardonioù, an ebat hag an dans
Ha c'hoazh koll e liberté, na pebez da drouk-chans.

N'eus ket c'hoazh peder sizhun emamp ni ar greden
E oam staget, er vro-man, evel gant ur chadenn
Met ar seurt chadennoù a zo fragil meurbed
Ur barrad avel deuz ar Pruss en-deus he zorret.

Ganet e-barz ar vro-man, ni a vevoe enni
Evit aour nag evit arc'hant, na guitajem outi
Ar Priussianed infam on forço da voned
Met malheur a vo dezho: na vezint ket espergnet.

Arsa on breudeur yaouank, tristan tra da weled
Mignoned o partian an deizhiou tremenet
Ar vamm baour desolet hag an tad glac'haret
Ar vamm baour en ur ouelan, a lare d'he fried:

"Bemdez me a zeblant din gwelet ma bugel
Treuzet gant ur voulet pruss dalet da vervel
N'on-eus evit e gonsoli an disteran mignon
Oh, Doue! Pa en em zonjan, rannan a ra ma c'halon."

An tad paour en ur ouelan a lare d'e bried:
"Te a zo diavis bras o vezan ken genet
Doue an Tad a zo mestr, na bermeto ket
E vefe on mab Yannig treuzet gant ur voulet."

Ar vamm a ya d'an daoulin dirak imaj ar Werc'hez:
"O Mamm dener, emezi, diwallit Yannig kez,
Digasit anezhan c'hoazh ur wech d'ar ger
Ho-pez truez ouzhin, ma Mamm dous ha tener."

Kenavo a laromp deoc'h tud yaouank on c'hontre
Diez a c'heo on c'halon, ha glac'haret bemdez
Kenavo deoc'h merc'hed on-eus ni anveet
Gant glac'har en on c'halon, kenavo deoc'h paotred.

Paotred yaouank ma c'hontre, a galon me ho ped
Da gonsoli ma mestrez p'he goelfet dezolet
Da gonsoli ma mestrez p'he goelfet he annui
Glac'haret eo ma c'halon o pellaad diouti.

Arsa breudeur yaouank, c'hwil, pere em heulio
Kalz ac'hanomp a daveo ar memez mizeriou
Pa vefomp ho repos dindan ar goabren
Gourveet dindan ar reo war ar memez plenen

Pa vefomp e-barz ar c'han hon spered a deuio d'ar ger
Ni a welo on zadou paour hag on mammou tener
E korn an tan ho welan, glac'haret ho c'halon
Hag an oll e-barz an ti en dezolasion.

Met Doue on zikouro hag e Vamm ar Werc'hez
Da bellaad deuz on spered ar seurt tristidigez
Pa vo zinet ar peoc'h, ni a deuio c'hoazh d'ar ger
Ha loreet an drapo hag on c'halon seder

Paotred canton Plouaret, ni a zo gwir Vretoned
Feiz ha nerz on zadou kozh n'int ket c'hoazh kollet
Ni a zo nerz en on brec'h ha goad en on goaziou
Mil malheur a vo d'ar Pruss bezan deuet en on bro.

Pa vefomp e-barz ar verv, en kreiz tan ar brezel,
En em gannan evel loened, paotred yaouank Breizh-Izel
Groet ma laro ar Frans, en amzer da zoned:
"Manket eo bet ar Pruss da fachan ar Vretoned!"